

TUD HUR BRO-NI


Mab er hlohour

Er huerzenneu saüet diarnehon


Ne oé ket tu d'un dén el Izidor chom hemb guerzen erbet. E kleuet konz anehon, er huerzerion e lakas aben ou spered de labourfat hag e saüas diù huerzen diarnehon. A pe oent bet saüet é oent merhat braüoh eit men deint breneu, rak er ré e zo bet kaset d'ein e zo a bep sord. En dud, doh ou hañnal en des bet ou hireit pé ou bèreit hag ou hampennet; hag elsé é kavér bremen kement a huerzenneu Klohour Melrand el ma hes a barrézieu e Bro Guéned. En ton e zo arriù ur sord geton. Ne oé ket tu de lakat ar *Dihunamb* rah en toñnieu ha rah er huerzonneu e zo bet kaset d'ein, ha chetu perak em es keméret unan ag en toñnieu: ha lakeit rah er huerzenneu é diù huerzen en ur gemér é peb unan anehé er péh ne huélen ket ér réral.

Elsé é oen hoah er suran de lakat édan deulagad en dud er honzen hanvalan doh er ré e oé bet kañnet de getan rah.


Allegretto




Mab er hlo - hour a vorh Mel - rand, Mab er hlo-



hour a vorh Mel - rand, Ur braü a bautr pe oé ieu-



ank o tra la té ra Ur braü a bautr pe oé ieu - ank o tra -



la. (Eil poz.)

Ketan Guerzen (1)

<p style="text-align: center;">I</p> <p>Mab er hlohour a vorh Melrand ; Ur braù a bautr, pe oé ieuank.</p>	<p style="text-align: center;">X</p> <p>— Nag é rehev é bouiz a eur, Soudard e vo hou mabig peur.</p>
<p style="text-align: center;">II</p> <p>Ur braù a bautr, ur pautr ker gé, Ur blèu milén ar é ziskoé.</p>	<p style="text-align: center;">XI</p> <p>— Lausket genein me mab Iouaññ Ha me rei d'oh é bouiz argant.</p>
<p style="text-align: center;">III</p> <p>Ur blèu milén, hir ha frizet, Ha biskoah nen dint bet trohet.</p>	<p style="text-align: center;">XII</p> <p>— Nag é rehev é bouiz argant, Soudard e vo hou mab Iouaññ.</p>
<p style="text-align: center;">IV</p> <p>Kent ma vo pèl, é veint krannet ; Rak d'en armé ma ret monet.</p>	<p style="text-align: center;">XIII</p> <p>Meit kerhet geton d'en Orient ; Mar bé reit d'oh, me vo koutant.</p>
<p style="text-align: center;">V</p> <p>Rak d'en armé ma ret monet : Ret é lahein, pé bout lahet.</p>	<p style="text-align: center;">XIV</p> <p>— Ha birùikin, mar dan d'er vro, Person Melrand sur e houilo.</p>
<p style="text-align: center;">VI</p> <p>Ret é lahein, pé bout lahet, Person Melrand 'des ean laret.</p>	<p style="text-align: center;">XV</p> <p>Person Melrand sur e houilo Hag é amieu tro ha tro.</p>
<p style="text-align: center;">VII</p> <p>Chervij er roué ma ret monet Ha dilézel en ol merhed.</p>	<p style="text-align: center;">XVI</p> <p>Ha ma vé marù hag interret, Me iei d'er havouit d'er vèred.</p>
<p style="text-align: center;">VIII</p> <p>Ha dilézel en ol merhed : Péh ur glahar eidoh pautred !...</p>	<p style="text-align: center;">XVII</p> <p>Me iei ar é dro, d'er vèred ; M'er saludo get mem bonet.</p>
<p style="text-align: center;">IX</p> <p>— Lausket genein, me mabig peur Ha me rei d'oh é bouiz a eur ?</p>	<p style="text-align: center;">XVIII</p> <p>Get mem bonet, m'er saludo, Ha get me gléan mé en trézo.</p>

(1) Er huerzen-men e zo geuiér abarh rak Mab er Hlohour e oé *Izidor* é hanù ha nann *Iouann*. A hendaral er Person ha ean e oé amieu mat.